



KIMIAD

POTRET LANARVILY

A BARTI DA CONLIE

da rejoigni o c'hommandant

Au otrou DA VINCELLES



Var ton : *Jeunesse trop coquette*

M'am bije gueset gallec, scriva var paper guen,
Me a vize en em implijet da ober eur gnaouen
En honor d'ar potret yaouanc a zo vont d'or c'huitat
Evit lavaret, Adieu ! em bije great eur c'himiad

Clevit-y o quimiadi, beuzet en o daelou,
Hor c'halonou zo manret dre nerz an trébuillou:
Allaz ! deut an dervez ma rauquimp partial,
A lavaret Adieu ! d'an olt e general.

Ni a ya da Conlie da gaout ar c'hommandant
Evit e rejoigni gant cals contantamant;
Pa erroimp er c'han, en eur vont d'ar brezel,
Quenta ini saludomp vo an otrou de Vincelles

Eun nebeudic amser en devize gallet
Choom c'hoaz en e gastel gant e famill caret;
Imiomp e vaillantiz pen deuz omp devaneet,
Deomp eta yaouanquis da sicour or mestre careto dia l'ogla

Clevit Ian Leon o quimiad dious e c'hoar Perrin.
Ac o lavaret Adieu ! vez da Alexandrin :
— « Adieu deoc'h va fillerez a deoc'h va nizien,
Gant cals a tristidiguez me o quitta cerlen.

Adieu ! eta d'ar vilin, d'ar maner c'hoas ouspeu,
Ne vezin guelet mui quen aliez o pourmen,
Ne velot mui ac'hanoñ o vont da Lesneven,
N'ac o vont da portesat da ti va ostichen. » —

Guelit brema vez Yvonne Pen-ar-Prat,
O tont da lavaret Adieu de c'hoar a de dad :
— « Adieu breudeur, va c'hoar, mignonet, a va zad,
Va c'halon a zo mantret o tonet d'o quitat. » —

Ar rema zo daou zen vaillant, ma zeus ebars er c'hontre,
Ar c'henta zo letanant a serjant eguile,
Ac eu em brepar bemdez da vont da sicour o bro,
Courach, courach, mignonet, ac en deo victorio.

Clevit c'hoaz o quimiadi daou vap a Leuriall,
Gant cals eus anni e quiteont ar guear,
Ouma eo ar velconi o quitat or c'hontre
Araog en em separi an eil diouz eguile.

François Leuriall a lavare evel eun den vaillant :
— « Me a ya d'an arme gant eur galon content,
Va c'halon zo courrouzel enep ar Prussianet,
A ne zistroïn d'ar guear quent a vint exterminel. » —

François Beyer a lavare de vam a de dad :
— « Eman zo eun dervez cris a ra din calonat,
Guelet va mam baour o leuva a va zad desolet,
Va c'halon ebars em c'breis a zo quasi rannet.

Adieu ! va zad, va mam, a deoc'h va c'hoaresel,
Adieu milin ar Mingam, o quitat a zo red,
Na vezio guelet mui content a disouci
O vonet da portezat e tro Laonarvily. » —

Van Arguennac a lavare de vam a de c'hoar :
— « Pa sonjan eu disparti mantret oua a glac'hur,
Nequet mont d'ar bresel a ra din meleoni,
Rancout lesel va mam ep souten nac appui.

Adieu deoc'h va mam baour, breudeur a c'hoareset,
Dalc'hit sonch eus o crouadur pa vezò partiet,
Adieu ! deoc'h Pellis Lein, parisioris Lanarvily,
Va guelet a reol c'hoas o dourou en o ti. » —

Daou vap ar Zegalen a lavare, beuzet en o daelou :
— « Ni a rancou brema bale a monet ens or bro.
Adieu ! eta or mam baour, or c'hoar maya caret,
Piou a deui do consoli pa vezimp partiet. » —

— « Adieu ! ta me Goulic'hen, Jean-Marie Pont, va mignone,
Camarad va c'hozioù, va breur dre ar galon;
Piou et la guemero lod emeus va foannoù,
Piou et la pa vin soudard gaeme a c'hoarzo. » —

— « Adieu ! va zad, va mam, eme Lan ar Bian,
Me a renq mont d'ar brezel a quitté Kerallaniran, » —
O pebez dislijadur da eur vam a d'eup tad
Beza separet eos o c'hrouadur, o pebez caloñnat !

Trista daou a partie oa potret ar Galliou,
O quiimiadi dious o zud beuzet en o daelou :
— « Courach on tud quer, gant laore ouz on tocou
Ni a zistroio prest d'ar guer evit sec'ha o taelou. » —

Louis ar Gallion a deu, e galon glac'haret,
Da lavaret adieu de vistri caret :
— « Adieu ! va mestres Anna a va mestre otroñ Gueun,
Gret evidon eur beden pa lavarol oc'h oferen. » —

Clevit brema iveau François Jacopin,
O tonet da quiimiada manret gant ar chagrin :
— « Adieu ! va breur, va c'hoar a deoc'h iveau va mam,
Pa sonjao en disparti va c'halon em c'hreis a rann. » —

— « Adieu ! eme Yan Gestin, va zad, a You ar Gall,
Me a ya eb chagrin da bouchas ar re all
Evidon-me a zo contant da vont sur d'ar bresel,
Pa pilin eur Prussian ne allo quet sevel. » —

Guelet brema c'hoas fleuren ar yaoankis
A vez guelet alies daoulinet en ilis;
Jean Paul eo e hano, ens a Kerneaval,
Giac'haret e garteris oc'h e velet o partial :

— « Adieu ! va zad, va mam, a deoc'h va c'hoareset.
Adieu ! va amezeen, querent a mignonet,
Pedit Doue evidon, pa vezin partiet,
A me iveau eus va c'hoste n'och ancouanac'hain quet. » —

Clevit iveau o quiimiadi Dominique Abolier,
Ac o lavaret adieu ! ispicial de dud quer :
— « Adieu ! va zad, va mistri, me a rang mont d'ar bresel,
Goudé ma vin partiet dalc'hit sounch eus o mevel.

Adieu ! ta va mam baour me a zo desolet bras.
O rancout oc'h abandonni en o cosni siouas.
Collet ganeoc'h ar guelet aboue pell amzer
N'o pezo den d'o souten en o cosni, va mam guer. » —

Mest, mevel ar maner, a renq iveau partial
A quitté e vistri manret gant ar c'hlac'hар,
Ne velot moi a nezan oc'h ober tro an ilis,
Quen a zistroi aman adarre var e guis.

— « Adieu eta tud chentil gant calz tristidigues.
Adieu deoc'h va famill, queoavo va mestres,
Adieu eta va mam baour gant carantez parfet,
Pa sonjan o quittat va c'halon zo rannel.

Guella migoun em boà e voa ar jardiner,
En deus va c'helennet certen e peb amser :
— Servich mad ar Franç e peb occasion
A da recompanç a roi joa d'as vignon. » —

— « Adieu ! eta va zud quer, eme Olier ar C'horr,
Adieu ! deoc'h va c'hender, va diou c'hoar, va daou vreur,
Me a ya tranquillament na da-sicour ar Franç,
Mar bez madelez Doue em bezo recompanç. » —

Leon ar Fily, paot ar vag, a renq brema o quittat,
Quittat e vam, e vreur ac ive e eta,
C'hoas e lavare gae a laouen : « Ema ar cocarden oc'h va sen
Adieu ! va merounes vad me a renq brema o quittat.

Ma zit-u plac'het yaouanc gant o bagaie vian
D'en em riscla var all lenn evelse oc'h unan,
Pa partio ar pilot, pa zei er meaz ar vro,
Me o suppli plac'het yaouanc lavarit dean quenavo. » —

Jean-Marie ar Gall a lavarc leun a tristidiguez :
— « Pion a deui en o cosni d'o souten va zud quez,
Me a renq quittat va zud ac ive va zrafic,
Tac'hit ta d'en em sicour pa vezin eat quit. » —

— « Adieu eta on tud quer, eme potret ar Repars,
Ni a ranq mont d'ar bresel ac o quittat siouaz,
All lezen a zo calet ha certen didrue,
O va separi dioc'h va fried a c'houi d'ioc'h o bugale. » —

Au daou paot yaouane-ma a zo eus a Lopre,
Ar chenta a zo eur serjant evel egnile,
Ac a renq partial iveau evit an arme,
A quittat o zud, o bro ac o c'hontre.

Jean-Louis Guevel a lavare en eur voela dourée :
— « Adien ! va zad, va breur, va diou c'hoar muya caret.
Adieu otrou person gant calz tristiguez
E teuan da quimiadi diousoc'h oll assamblez. » —

— « Adien va c'chronadur eme an otrou person,
Quendalc'h da veza for, te a zo den a galon;
Te a pezo henor pa vi ebars er gomhat,
Dre ma zout bell fidel da senti oc'b da tad. » —

— « Adieu ! ta va zud paour, a deoc'h va mistri vad
Gant calz a tristiguez e teuan d'o quittat.
Pa vezin eat d'ar bresel a quritteat va bro,
Dalc'hit sounch eus o mevel, d'eus a Per Abarou.

Adieu otrou person, a deoc'h Lanarvily,
Ne clefoc'h mui va moues o cana en oc'h Ilis,
Me a renq mont d'ar bresel, va breur Jacques a me ;
Adieu d'or mam, d'on tad, d'or breur, d'or c'hoarive. » —

— « Adien ! gant calonnat va mam carantezuz,
Me a renq o quillat a combattu oc'h ar Pruss ;
Adieu deoc'h otrou person, eme Sebastien Normand ,
Me o ped da bedi evidon ac e partiin contant. » —

Clevit brema souden comzou Auguste Abyan,
Zo hanvet capitaine, e vreur Renè serjant,
An daelon en o daoulagat a mantret o c'halon,
O rancont lesel o mam ebars en abandon.

— « Al lezen a zo cruel a siouaz dinatur,
O separi eur vam dioc'h pevar crouadur.
Guechal pa voach'biaunic em boa collet o tad,
Brema pa meuz o savet e ranquit ya c'huittad. » —

— « Adieu ! or mam baour eme ar pevar breur,
Pedit Santez Anna evit ma tistroimp d'ar guer.
Adieu ! or mevel fidel, dreist oll c'houi a pedomp
Da soigni an daou tieguez a da souten or mam. » —

Ar pevar den yaouanc-ma a zo a Kernilis,
Queuz bras o deuz dezo an oll parisiornis,
A dreist oll ar heorien a zo certen revinel,
Rac potret an Abyan o sicoure bepret.

— « Adieu ! milio ar Mimgam a d'al len a d'ar vag.
Adieu ! oll plac'het yaouanc abars dont d'o quillat,
Ni a zeu oll assamblez d'o pedi a galon,
Da lacat eun oseren en on intantion.

Ni a lavar quenavo iveau d'ar c'hangonnier,
En denz on instruet gant carantez sincer,
En d'eus on engajet da gombatti vaillant
Evit ma vezo or bro eur vech c'hoaz triomphant.

Adieu ! deoc'h otrou Mer, comt eus a Kermenguy,
Adieu iveau d'o famill, d'a parrez Lanarvily,
Adieu ! deoc'h adjoint-mer a deoc'h iveau Louise,
Adieu otrou scolaer a deoc'h iveau bourquiz. » —

— « Adieu ! potret yaouanc eme an instituteur,
Chouï a zo tud vaillant ac o pezo bonheur,
Na da netat ar vro d'eus ar Prussianet,
A da zistrei endro da gaout o mignonet. » —

— « Adieu ! deoc'h otrou Guevel, Mear eus a Lopre,
Assambles gant o buguel ni a parti d'an arme.
Adieu ! deoc'h otrou person d'eus ar memes parrez,
Ni on d'eus o selaouet gant cals a garantes.

Bemdez en o pedennou dalc'hit souuch ac'h anomp
Pa zeot d'an oferen, neuze pedit evidomp,
Evit m'on dezo courach pa vimp ebars er gombat, pesz
Ma chommo on eunemiet beuzet en o goat.

Adieu ! otrou saint Guesnou patron eus or parres;
Adien ! da Sant Guenegan, Adieu ! da sant Joseph;
Adieu ! da santes Anna ac iye da sant Paul,
Gant grâc Doue ! ac ar Verc'hes ni en devo ar victor.

Adieu ! Tribunal Santel a cador ar virionnez,
Ne vezimp quelet mui o selao assambles
Mouez or person corantezus a zeue d'on exortioz salent
Da veza fidel da Jesus a d'ar Verc'hes Vari.

Quenavo tour Lanarvily a deoch cleyer laouen,
Ne clevimp quelet mui o mouessiou da poent an oferen,
Ne vezimp quelet mui oc'h eul ar procession,
Na qoen neobeul daoulinet etal c'ras ar mission.

Adieu ! gueret ar barres, douarou beniguet,
A cholo on tudou cos gant Doue ! bel galvet,
Da chouet an aoaona clemez, ne deimp mui var o beziou
Da scuilla an dour santel mesquet gant on daelou.

Adieu ! quement e garomp, en nebendic amser,
O ped fisianq er Verc'hes ac e tistrolap d'ar guer,
Aben eun daou pe tri mis carguet a enorion,
Gant cals a vaillantis goude or victorio.

Ma oc'h eos c'hoant da c'houzout ac iveau da glevet
Gant piou e zeo ar c'himiat a neves composez :
Gant unan a Landivisior, o choum e Lanarvily,
Ac araoe finissa a zeo d'o saludi.

MARIE-FRANCOISE GUÉGUEN.



KIMIAD

EUR

ZOUDARD YAOUANK

Var ton : *Al labourer.*

Va c'halon a zo frailliet dre nerz ma enkrezon,
Va daoulagad entanet u'ho deuz mui a zaelou;
Deut eo siouaz ann devez ma renkao dilezel
Lec'h kaer ma bugaleac'h, ma bro douç Breis-Izel.

Keno ! d'id ma zi balloù, kuzet bars ann draonienn,
Tachen glaz var he-hini, bugel, e c'hostien ;
Gwez ivin ker bodeuniek, en disheol d'euz pe-re
E pad tomder ann anvou, e kousken da greis-de.

Keno ! keno ! mamm a tad, brema n'esperit moi
E chomse ho mab karet vit harpau ho kozni,
Evit gonnid dec'h bara, 'vel m'oh peuz gret dezhän,
All lezenn zo didruez ho kuilaad a renkùn

N'ag a vech, va mammener, a renkset-hu leava,
Pa zeui ma c'hi ankenet en dro dec'h da ruza ;
Pa welfet, bars ann oaled, va skabellik goulio,
Ag ar c'hisfind o steüi deuz ma feno-baz dero.

Keno hered ar barros, douarou consacret,
Pere a guz va c'herent gant ar Zalver galvet ;
Da wéi ann Anaou clemus nin mui war ho peziou
Da scuilla dour biniguet mesket gaot va daelou.

Keno va muia caret, ma dousik coant Mari,
Eur blanedenn diegar a deu d'omm glac'hari ;
Evrzeded a levezek skenduz, zo tremenet
Vel en oabr, ar goumoulen gaot ann avel casset,

'Na welio mui da lagad ker lemm a ker laouen
Ho wirvi gant plijadur, enn li pa erruen,
Da zornik wenn ker mibin o trei ar c'harr en dro,
Da wouez flour mui n'a glevin o cana va gwerzo.

Pa oamp er c'hatékismou, omm daou c'hoas bugale,
Or c'halonou diskiant, en kuz ha n'em gleve,
Dirag Gwerc'hes ar c'hroazhend, nag a vech he tonezomp
N'a erru-je birvikenn, disparti en tre-zomp.

Yaouanc a dibreder, siouas n'e wiemp-ket
Nag a bed c'hwarventez er vuez zo mesket ;
Evid-omm n'e oa, neuze, lezennou 'na Roue
N'anveemp mert eul lezenn, hini ar garantie.

Keno va nes amezek, Yannik va guir mignon,
Kamarad va c'hoariou, va breur dre ar galon,
Piou a gemero bremâ, eul lod euz ma foanio ?
Piou a gomzo ganeme deuz ar ger ag ar vrô ?

Ep-hon te ielo breman, er parosjou tosta,
Da bigosat all leuriou bars el lasou-dorna ;
Ep-hon te iel da c'hounid maout ar c'hourennadec ;
Da jaicha var rubannou ebars ar varadec.

Keno va c'hazek melen, skâu evel eunn eiès,
Mistr evel eul logoden, gentil 'vel egn oanès,
N'ed sentio keo indann-hon, gant ann hast, o trippâl
Ma daouarn mui n'e stagfont ar zeien war da dâl.

Keno, ma c'hihès *Mindu*, ma leal camarad,
N'effomp ken, dre ar glizen, da glask roudou ar c'had ;
N'e glevin ken, er mene, da chilpadenn skiltrus,
War ma dorn mui n'e zentin da deod garantézus.

Abenn eunn nebend amzer, cals a vignonet ien
Bars er zoudard divroët, ep mar, ne sonjfont ken :
Mès da galon te, *Mindu*, n'eo ket ken ankoezus.
Pell he ri c'hoas va c'hanvou dre da iezou clemmus.

Keno ta plijaduriou, leuriou nevez, festou,
Rentadeg-neud noz-vezou, foariou a pardonnou,
Ebatton ker birvidic, biniou sard a skientin
N'a drido mui va c'halon gant da zoniou lirzin.

Keno kement a garân, keno da virviken !
Pell deuz a Vreis me varvo, mantret gant ann ankenn,
'Vel eur blanteun kizidic, evit ar vrô crouët,
A renk gwenvi a mervel, kerkent, m'he divroët.

